


8N3-4-028

ESKOPTI KEMPER HA LEON

KANTIKOU BREZOUNEK

EVIT AR VUGALE



KEMPER

MOULLET E TI ARSÈNE DE KERANGAL

Moullier ann Eskopti

Imprimatur :

Kemper, 19 a viz Meurs 1919.

A. COGNEAU,

Vic. gén.

Pedennou diouz ar mintin hag an noz hag an « Angelus »
a vez kavet e leor ar C'hatekliz.

KANTIKOU

1 ARAOK AR BREZEGEN

Spered-Santel, Spered a sklerijenn,
Plijet ganeoc'h ennomp brema diskenn.
A sklerijenn kargit hor sperejou,
A garantez tommit hor c'halounou.

Ann Ebestel, enn eur zal asamblet,
A dan ho kras oc'h euz bet holl karget ;
Bet evidomp ar memes madelez,
Ne d-oun, sionaz ! nemet sempladurez.

Guerc'hez Vari, espérans ar pec'her,
Pedit Jezuz, ho mab hag hor Zalver,
Grit d'hor spered kounpren komzou Doue
Ha d'hor c'haloun ho miret goudeze.

2 EVIT AR VENEDIKSION

Adoromp holl e sakramant ann Aoter,
Eunn Doue kuzet, Jezuz hor mestr, hor Zalver.
Sperejou evuruz, prinsed euz he balez,
Gant karantez ardant meulit-hen da jamez.

Gwir Vab Doue, evidomp holl inkarnet,
Ann env, ar mor, ann douar oc'h euz kronet.
Deut, va Zalver Jezuz, euz ann aoter, ho tron,
Da rei brema d'eomp holl ho penediksion.

Henor ha gloar gant karantez eternal
D'ann Tad, d'ar Mab, ive d'ar Spered-Santel.
Menlomp hag adoromp tri fersoun e Doue,
Epad ann oll amzer hag enn eternite.

3 VAR AR FINVEZIOU DIVEZA

Sonjit, den faziet,
 Sonjit enn eternite !
 C'houi, sionaz, zo dallet
 Gant ann drouk, ar vanite,
 Sonjit e rankot mervel
 Ha mont euz ar bed-ma,
 Pa zeui Doue d'ho kervel
 Aberz nemeur ama.

Gant kalz a spount neuze
 Ez it dirak ar Barner :
 Striz eo justis Doue,
 Ha goaz a z3 d'ar pec'her.
 Ear zetans a resefot
 A vuez pe varo,
 Hag ar stad m'en em gevfol
 Da viken a bado.

Nemed eur vech hebken
 Ar baradoz ne goller ;
 Euz ann ifern biken
 En em denna ne c'heller !
 Hogen baradoz kollet,
 Setu tout eat da goll,
 Ha baradoz gounezet,
 Setu gounezet holl.

Roet en devez Doue
 Ar choaz d'ehoc'h, eguirionez,
 Enn eil p'enn egile
 Da vont divar hor puez :
 Enn ifern p'er baradoz
 E renkot chom atao,
 Da zeui pe da repoz,
 Goude pred ar maro.

Gant sonjal enn traou-ze
 Eaz vije d'ehoc'h kimlada
 Diouz kement d'hoc'h ene
 A ra eur gaou ar brasa ;

E leac'h klask tu da bec'hi
 C'houi zistrofe a-grenn,
 E leac'h en em beur-zaoni
 C'houi rafe pinijenn.

Goulzkoude oc'h ken dall,
 Ken diboell, ken aheurtet,
 Ma n'eus nemed traou fall
 E pep korn euz ho spered.
 Dievez var ann affer
 Euz ho silvidigez,
 N'oc'h euz bet enn he c'henver
 Nemed leziregez.

Savetelt hoc'h ene
 Ha d'ann ifern renonsit,
 Choazit abred ann Ee,
 Lakit ho poan d'he c'hounit
 Dre 'nn euvrou a drugarez,
 Dre ann holl vertuziou,
 Ha dre eur guir garantez
 'Vit Doue, hon Aotrou.

Kovesait a galoun
 Ho pec'hajoù tremenet
 Ha goulennit pardoun
 O keuzia gant lealded ;
 Reglit guelloc'h ho puez
 Heb kredi pell beva,
 Ha tremenit peb dervez
 Eyel ho tiveza.

Ar bed a dremeno,
 C'houi a dremeno ive,
 Ann ifern a jomo
 Epad ann eternite.
 Ar blijadur zo moged
 A bad berrik amzer.
 Ha bepred poaniou kalet
 A voasko ar pec'her.

Tec'hit eta buhan
 Divar hent fall ar pec'hed,
 Pe var eur guele tan
 Abred c'hui vo gourvezet.

M'oc'h euz diskouarn da ze-
 Klevit ha klevit mad : [laou,
 Choazit hirio ann Envou,
 Varc'hoaz vo divezad.

4 VAR AR MARO

Selaouit, ma Jezuz, selaouit ouz ma fedenn,
 Ar maro zo spountuz, em maro deut d'am difenn.

Diskan :

Guere'hez Vari, va mamm leun a drue,
 Em maro, gant Jezuz, roit sikour d'am ene.

Pa zeni spes ar maro da spounta va daoulagad,
 Diskouezit d'inn, Jezuz, bizach ha kaloun eunn tad.

Pa zeui c'houezen ma zal ha ma dion jod dislivet
 D'ober heuz d'ar re all, c'houi, ma Jezuz, tostaet.

Pa n'hellin ken klevet komzou ann dud, ma Zalver,
 Komzit, c'houi, d'am c'haloun gant ho mouez dous ha tener.

'Vit ar vech diveza pa larinn : Jezuz ! Jezuz !
 Klevit, o ma Zalver, ouz ho pugel truezuz.

Pa gouezo ann daelou diouz ma lagad o vervel,
 Bennigit-hi, Jezuz, grit ma vint daelou santel.

O Jezuz, pa velot ma c'haloun baour o ranna,
 Var ma foan, ma anken, skuillit enr beradik joa.

Pa vo red d'inn kuitaat traou ar bed evit james,
 Bezit, c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma finvidigez.

P'en em zispartio evezuz va c'horf va ene,
 Resevit, va Jezuz, ann ofrans euz va bue.

Enn ho pardedigez pa vezinn, o va Jezuz,
 Bezit dous em c'henver, roit d'in ar vuez enruz.

Me laka va fedenn, va buez ha va maro,
 Etre daouarn Jezuz ha Rouanez ann envo.

ANN IFERN

Diskennomp holl, kristenien, enn ifern da velet
Doare trist estlammuz, ann eneon daonet
Zo eno dre vir Doue, dalc'het ebarz ann tan,
O veza great goall zispign euz he c'hras er bed-man.

Ann ifern zo eunn toull doun, leun a denvalijenn,
E leac'h ne veler morse 'r bihana sklerijenn ;
Ann doriou zo bet serret ha prennet gant Doue,
Ha n'ho digoro biken : kollet eo ann alc'houe.

Eur furn c'horet er bed ma ne d'eo nemed moged
E kenver tan ann ifern tan eneon daonet :
Guell e ve devi enghi ac'hann da fin ar bed
Eget beza enn ifern epad eunn heur dalc'het.

Iudal a reont a bouez penn, evel chas kounnaret,
Ne c'houzont pe leac'h tec'het, e peb leac'h int leaket ;
Ann tan zo var ho gorre, ann tan zo dindanho,
Ann tan zo a beb kostez hag ho devo ato.

Ar mab a lamm gant he dad, hag ar verc'h gant he mamm.
D'ho stleja gant mil malloz dre ho bleo kreiz ar flam !
Malloz d'ehoc'h, greg diaked, hag oc'h euz hor ganet
Malloz d'ehoc'h, tad didaivez kiriek oc'h oump kollet !

Ho magadurez a vo da viken gant Satan,
Ann hirvoud, ann dizesper, etouez ar gozcion tan,
Hag ho evach, ho daelou... beradik dour ebet
'Vit ho muzellou disliv pe glaz gant ar zec'hed.

Ha kignet vo ho c'hroc'henn hag ho c'hig difrenzet
Gant beg ann aered viber ha dent ann diaouled ;
Hag enn tan e vo ruillet ho c'hig hag ho eskern,
Evit ma tevo krenvoc'h founr skrijuz ann ifern.

Ann tan-ze zo c'houezet dre vuhanegez Doue,
Ne gollo ket euz he nerz hed ann eternite ;
Biken na daolo moged, ha b ken na zevo ;
Heb ehana d'ho leski biken n'ho distrujo.

VAR AR GONTRISION

Done, guir bried
D'ann ensoe,
C'houi c'h euz va c'hrouet,
C'houi c'h euz va frenet,
C'houi c'h euz va c'hrouet,
'Vit ann envou.

Diskan :

Guerc'hez banniget,
Mamm druezuz,
Me am euz lazet
Dre veur a bec'hed,
Me am euz lazet
Ho mab Jezuz.

Abaoue pell amzer,
Kovez 'rann ouzhoc'h.
Ez oun, va Zalver,
Sionaz ! eur pec'her,
Ez ounn, va Zalver,
Enebour d'ehoc'h.

Allaz ! me zo bet
Bete vremen
Kalz re aheurtet
Ebarz em fec'hed,
Kalz re aheurtet,
Cheuch a rankann.

Pignomp, va ene,
Var ar C'halvar,
Guelomp eunn Doue
Leun a garante,
Guelomp eunn Doue
Enn he c'hlae'har.

He dreid zo griet
Gant ann tachou,
He gorf dispennet,

He benn kurunet,
He gorf dispennet
Gant ar foustou.

Guel-hen divisket,
Savet er grosz,
He zaouarn staget,
He gostez toullet,
He zaouarn staget
Gant tachou braz.

Me eo, va Doue,
Me va unan
Em euz heb true
Dre va goall vus,
Em euz heb true,
Kreasket ho poan.

C'houi a zo bepred
Eur guir Zalver,
Na c'houlenit ket
E ve den kollet,
Na c'houlenit ket
Koll ar pec'her.

D'ho treid e pokann
Gant Madalen,
Re e taleann,
Re ball e'kasann,
Re e taleann
Va finijen.

Gened koz bepred,
Bepred nevez,
Poent eo ho karet,
Salver benniget,
Poent eo ho karet
E guirionez.

ANN DIAOUL MUD

Pa zaoulinomp evit kovez,
Hon énebour zo var evez,
Ema tostik er c'hostez kleiz,
Dionaitit..., braz eo ha valiz.

Hanvet eo bet ann Diaoul mud,
N'e ket heb guir en deuz goall vrud ;
Ifernia 'reaz kalz tud, slouaz !
Ha kalz re all a gollo c'hoaz.

Derc'hel kloz ginou ar pec'her,
Setu eno he holl vicher ;
Keit ha ma nac'her ar pec'hed
Her gout a ra : pardoun ebéd.

Kaer o pefe iun ha lenva
Ha lavaret *meū culpā* :
Pec'hed a guzer er galoun
Biken n'en devezo pardoun.

Great o pe, siouaz ! kant torfed ;
Mar kovesait, oc'h pardounet.
Grit eur pec'hed marvel hebken,
Mar hen nac'hit, pardoun biken.

Euz eur remed a ro pare
E rit eur poezoun d'hoc'h ene,
Hag e kreiz feunteun ar vuhez
E kavfot maro didruez.

It, a lavar ar c'honfesour,
Ann env zo brema d'hoc'h digor.
Allaz ! d'ann ampoent, dourn Doue
A zo o serra dor ann Ee.

P'oc'h deuet da govez, hoc'h El-mad
A loa oc'h en em laouennaat :
Diouzhoc'h, great ho sakriliach,
Trist-holl e tistro he vizach.

Ann Diaoul a loa bet nec'het
Gant aoun ne rankje kuit tec'het ;
Mes emma brema adarre
Lojet brao-braz enn hoc'h ene.

Gant ho teod gaouiad ar poezoun
A zo kuzet enn ho kaloun ;
Ha, siouaz d'hoc'h, bete 'r maro
Kuzet ha kuzet e chomo.

Ann Diaoul mud gant he ardou
A zalc'ho serret ho kinou,
Ha rentet mud enn ho puez
C'houi varvo mud..., taolit evez !

VAR AR GOMMUNION

Elez euz ar baradoz, sellit pebez henor
A ra deomp er zakramant Jezuz, hon redemptor !
Eur vech evit hor prena ez eo bet inkarnet,
Hag evit dont d'hor maga ganeomp e chom bepred.

Diskan :

Mari, guir vamm da Zoue, Mari, va mamm dener,
Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver.
Me ne d-oun siouaz ! netra, netra nemed pec'hed,
Mes ennoc'h ec'h esperann, o va mamm benniget.

Krouer ann Euv, ann douar, var ann aoter, bemde,
Dre gomz nerzuz ar belek, a ziskenn etuz ann Ee ;
Eunn Doue, kalz hueloc'h eget ar firmamant,
En em izela dindan spesou ar zakramant.

Eunn Doue ne jench jamez epad ann holl amzer,
Eunn Doue var balz hé zourn a zong ar bed antier,
En em lez dre ar belek da veza dibiaset,
Evit disken e kaloun ar paourza zo er bed.

O mirakl ar sonezusa etre ar miraklou !
O burzud ne c'hell koumpren ar c'haera sperejou !
Evit gounit kalounou ho pугale ingrat,
Ho magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho koad.

Nann, evit eur mab unlk, ar vamm ann denera
 Biskoz ne zantez kement he c'haloun o tomm ;
 Goude ker braz karantez, ha l piou c'helle-refuz
 Konsakri he holl galoun d'ho karet, va Jezuz !

Mar d-eo dister kalounou ar Zent hag ann Elez
 Evit karet eunn Doue ken din a garantez,
 Pensaot e prizit. Jezuz, dre ar gommunion;
 Euz kalounou ker sklaset dont da ober ho tron ?

Pensaot kredi sjeza ouz taol zakr eunn Doue,
 Goude beza offanset kement he vajeste !
 D'ho taoulagad, va Zalver, ne c'hellomp prezanti
 Nemed kalounou siousaz ! leun a ingrateri.

Goulzkoude, pa gommandit tostaat ouz ho panked,
 Dre eur gomz a drugarez effasit va lec'hed,
 Teuzit sklaz hor c'halounou gant tan ho karantez,
 Neuze ni ho resevo gant joa ha santelez.

Prestit d'inn ho tiouaskel, va El-mad soursiuz,
 Ma nijinn evel eur gouln etre divreac'h Jezuz,
 Me rei dez'han va c'haloun, hen rei d'inn he hini,
 Eno me a repozo e peoc'h ha dizoursi.

9 VAR AR GOMMUNION

Diskan :

Deut, va Doue, deut da ren em c'halon,
 Deut d'am maga dre ar gommunion.

Va ene paour a zo ouz ho kortoz, va Zalver,
 Evel eunn douar ien, skarnilet gant goall amzer.

Mar d-eo guir ho komzou, c'houl a vezo d'am ene
 Ar glao dous a bardaez pe glizennik ar beure.

C'houl eo ar pastor mad, me ann danvad dianket ;
 Edon kreiz ar bleizi, hag oc'h euz va diboaniet.

Mar d-oc'h ar medisin, me siousaz ! eo ar c'hianvour,
 Louzaont ar gouliou great d'inn gant va enebour.

Medisin, pastor mad, n'e ket aoualc'h kement-se,
 Bez' ez oc'h em c'henver eunn tad leun a garante.

Dre ma tostaan ouzhoc'h ha dre ma tomm va c'halon
 Hi lavar ez oc'h c'hoaz he fried hag he mignon.

Rak-se 'ta, va Jezuz, me zeu da glask ho panked,
 'Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun, enn he zec'hed.

Siousaz ! piou ez ounn-me da vont davedhoc'h, Aotrou ?
 C'hoant am be da bellaat, pa zonzann em fec'hejou.

Hogen, c'houl hoc'h-unan a c'houre hemenn d'inn tostaat,
 Livirit 'ta eur gomz hag en em gavin e stad.

10 AR PASK KENTA

JEZUZ

Me 'm euz preparet eur banked,
 Ar presiusa zo er bed,
 Evit rei d'am holl bugale
 Vs c'horf, va goad ha va ene.

AR VUGALE

C'houl zo meurbed, o va Jezuz,
 Ean hor c'henver karantezuz,
 Evit beza d'omp preparet,
 Hirio ann deiz, eur seurt banked.

JEZUZ

Pell zo emounn, ha deiz ha noz,
 Ean tabernakl ouz ho kortoz ;
 Mall braz am euz, bugaligou,
 Da ziskenn enn ho kalounou.

AR VUGALE

Allaz ! allaz ! ne gredomp ket
 Mont d'ho reseo. Salver ar bed ;
 C'houl zo ker braz ho santelez,
 Ha ni bec'haz ken aliez.

JEZUZ

Mar emaoch e pec'hed marvel,
Na zeuit ket d'am banked santel ;
Araok, goalc'hit mad ho kaloun
E dour gallouduz ar pardoun.

AR VUGALE

E sakramant ar Binijenn,
Ni hon euz bet ann absolvenn
Ha redet o deuz hon daelou
Gant keuz guirion d'hor pec'hejou.

JEZUZ

Deut prim eta, deut d'ar banked
Am euz evidoc'h preparat ;
Tostait holl hag heb dale,
Laouennaat a reot ho Toue.

AR VUGALE

Pa'z oump galvet gant hor Zalver,
Ni dostaio ouz ann aoter.
N'en deuz ar c'haro c'hoant ker braz
Da redet d'ar feunteunioù glaz.

JEZUZ

Abarz dont da gommunia,
Goulennit pardoun da genta
Ouz kement oc'h euz offanset,
Dreist holl ho tad, ho mamm garet.

AR VUGALE

Pardoun, va mamm, pardoun, va zad,
Me n'ounn ket bet eur bugel mad ;
Hiviziken, dre c'hras Jezuz,
Mé vo modest, dous ha sentuz.

JEZUZ

Pardounit, tadou ha mammoù,
Pardounit d'ho pugaligou,
Me ho deuz meia offanset
Hag am euz d'hezho pardounet.

AR VUGALE

O Tad eternal, va C'hrouer,
Hor c'hasit pelloc'h d'hor Zalver,
Mall eo, n'hellomp ket mui gortoz,
Roit d'emp Jezuz pe varadoz.

Ha c'houi, Mari, ken truezuz,
Hor renit da vont da Jezuz,
Ma kavimp hiriò ar vuez
E sakramant he garantez.

11 ENN HENOR D'AR GALOUN SAKR

O Kaloun Sakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbet karantezuz,
Plijet reseo, me ho suppli,
Ann dezir a meuz d'ho meuli.

C'houi eo ar zoursenn prestuz
Ez ar grasou krenv ha nerzuz
A resevann, da bep mare,
Hag a douc'h kement va ene.

O Kaloun Sakr, c'houi 'zo eunn or
Hag a velann beprad digor
Da zigemer ar bec'herien,
Pa fell d'he ober pinijenn.

Bet oun sionaz ! o va Zalver,
Dianaoudek enn ho kenver.
Sellit ouz va ene ingrat,
Distrei a rann a galoun vad.

Torret am euz lezen Doue,
Kant ha kant mil guech am bue,
Muntrer infam, pec'her divad,
Trenzet am euz kaloun va Zad.

Dirazhoc'h, Kaloun adorabl,
Me ra va amand honorabl :
Pardoun euz va zakrilachou,
Pardoun euz va holl fec'hejou !

Pardounit ivez ar c'hrimou,
 Blasfemou, irreveransou,
 Great bemdez gant ar baianed
 Ha gant ann holl heretiked.

Mez siouz ! d'comp-ni kristenien,
 N'hon euz bet nemed ienien
 Evit karantez hor Zalver
 Er zakramant euz ann aoter.

Stonet holl betek-ann douar,
 Hor c'haloun rannet gant glac'har,
 Kriomp gant eur vouez truezuz :
 Pardoun, pardoun, Kaloun Jezuz !

Pastor mad, c'honi oc'h euz klasket
 Ann danvad a ioa dianket,
 Setu hen o c'houlenn pardon,
 Digorit d'ezhan ho Kalon.

Me garfe gant va goad goalc'hi
 Va malis, va ingrateri,
 Da viana me ho gouelo
 Betek ann heur euz va maro.

Ouspenn-ze, enn hoc'h ilizou,
 Gant respet e rinn pedennou,
 Ha gant eur guir devotion
 Me ielo d'ar gommunion.

D'ann offerenn ez inn ive,
 Gant feiz ha gant humilite,
 Ofre a rinn eno d'ho justis
 Ho Kaloun Sakr e sakrifis.

Esper am euz da rapari
 Va malis, va ingrateri,
 Dre verit ho koad presiu
 Hag ho Kaloun karantezuz.

Kemerit ivez. evit kred,
 Kaloun ho Mamm zo bet treuzet,
 Eharz ar groaz, gant seiz kleze,
 Dre ann nerz euz he c'harante.

Unanomp brema hor mouezliou,
 Leveromp dre hor c'hantikou :
 Gloar d'ho Kaloun, Salver Jezuz !
 Gloar d'ho Kaloun, Mamm druezuz !

MEULOMP HOLL

Diskan :

Meulomp holl da james *bis.*
 Jezuz hag he vadelez !

Me ho meul, o va Jezuz !
 C'honi oc'h euz va c'hrouet,
 C'honi oc'h euz va frenet,
 C'honi am mag, o va Jezuz !

Mil bennoz d'ehoc'h, o Jezuz !
 C'honi a zo va fastor,
 C'honi a zo va zenzor,
 C'honi zo va holl vad, Jezuz !

Pardounit, o va Jezuz,
 Va factou tremenet.
 Enn amzer da zonet.
 Me vo fidel d'ehoc'h, Jezuz !

Bennigit, o va Jezuz,
 Va c'horf ha va ene,
 Va mirit noz ha de
 Euz a bep drouk, o Jezuz !

Hastit, hastit, o Jezuz !
 Terri va jadennou.
 Ah ! pegouiz, enn Envou,
 Ho meulinn-me, o Jezuz !

Ra vezo meulet Jezuz
 Dre holl, da bep mare,
 Ni bemnoz ha bemde. [zuz !
 Meulomp holl, meulomp Je-

KANTIK AR BARADOZ

Jezuz, peger braz va
 Plijadur ann ene,
 Pa vez e gras Doue
 Hag enn he garante. } *bis.*

Berr 'kavann ann amzer
 Hag ar poaniou dister,
 O sonjal dejz ha noz
 E gloar ar Baradoz.

Pa zellann enn Euvo
 Hag etrezek va bro,
 Nijall di a garfenn
 Evél eur goulmik venn.

Pa vo pred ar maro,
 Neuze me gimiado
 Diouz ar c'hig ankeniuz,
 Enebour da Jezuz.

Gortoz a rann gant joa
Ann termen diveza,
Hast am euz da velet
Jezuz, va guir bried.

Kerkent ha ma vezo
Torret va jadenno,
M'en em zavo enn er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar gloar,
Dreist ann heol, ar stered,
Me a vezo douget.

Eat pell diouz ann douar,
Traonienn leun a c'hlac'har,
Neuze me rai eur zell
Ouz va bro Breiz-Izisl.

Neuz me lavaro :
Kenavo d'il, va bro,
Kenavo, bad poaniz,
Gant da bechou troumpluz !

Kenavo, paourte,
Kenavo, vanite,
Kenavo, trubuliou,
Kenavo, pec'hejou.

Pelloc'h na zoujinn ket
Ardou ann drouk-spered,
Biken me n'em gollo
Goude pred ar maro.

Goude pred ar maro,
Gant joa me a gano
Torret eo va jaden
Ha me libr da vilken.

A bep tu pa zellinn
Kement tra a velinn
A rai d'am deoulagad
Ha d'am c'haloun mil vad.

Doriou ar Baradoz,
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zantezed,
Prest d'am digemeret.

Me vo digemeret
E palez ann Dreinded,
E kreiz ann henoriou
Hag ar meuleudiou.

Me c'hello, evit mad,
Guelet Doue, ann Tad,
Gant he Vab eternel
Hag ar Spered-Santel.

Me a velo Jezuz,
Ean eur c'hiz dudiu,
O lakat var va fenn
Ar gaera kurunenn.

Ho korfou evuruz,
A lavaro Jezuz,
Oa tenzoriou kuzet
Ean douar benniget ;

C'houi zo, em baradoz,
Evel bokedou roz,
Divleuniet d'ar mare
Hag a vleun adarre.

Pegen dous 'vo kievat
Jezuz o lavaret :
Daut, servicher fidel,
Daut d'ar gloar eternel.

Evit poanion dister,
Evit ankeniou berr,
Me vezo past mad
Gant Doue, va guir dad.

Kaer e vezo guelet
Ar Verc'hez benniget,
Gant daouzek steredenn
A ra he c'hurunenn.

Guelet a rinn ouspenn,
Gantho peb a delenn,
Ele hag Arc'hele,
Holl o veuli Doue.

Guelet a raimp-ni c'hoaz,
Leun a c'hloar, leun a c'hras,
Hon tado, hor mammo,
Hor breudeur, tud hor bro ;

Guerc'hezad a bep oad,
Sentezed a bep stad,
Gragez, intanvezad
Gant Doue kurunet.

Ann holl sledigou
Var ho askelligou,
Ker mignoun, ker laouen,
A nijo dreist hor penn.

Euruz led heb he far,
Sonjal ennhoc'h me gar,
C'houi 'ro nerz d'am c'halou
Pa gouez anken varnon.

Ean holl boanion kalet
A gorf pe a spered,
Me zonjo deiz ha noz
E gloat ar Baradoz.

BENNOZ HA MALLOZ

Euruz ann hini a garo Doue
Euz he holl galoun hag he holl ene. (bis)

Ann den a blijio da Zoue, hon Tad,
A zo diouallet ha diouallet mad.

Ean ti hag er park, enn deiz hag enn noz,
Doue varnezhan a skuillo banno.

Ganthan ha bried hag he vugale
O devezo perz e bennoz Doue.

Evel eur vezenn, douret ha griziu,
E tougo frouez, delion ha bisantiou.

Ma'z eo plavidik, e rai vad d'ar paour,
He zourn a vo prest atao d'her zikour.

Ma n'en deuz danvez, en deuz kalz guelloc'h :
He galoun zo lac'h, chast ha leun a beoc'h.

Diouz c'houezenn he dal e febr he vara,
Goude sin ar groaz, heb klemm a netra.

Laouen er vuez, laouen er maro,
Gant ann Elez mad d'ann Eav e pigno.

Evidoud, pec'her, neç'h euz da c'hedal
Nemed buez trenk hag eur maro fall.

Pec'her, deuz enn dro, deuz ha deuz buhan,
Rak ganez dija'ema c'houez ann tan.

Kemer heb dale hent ar Baradoz,
Pe, m'hel lavar d'id, kaout a ri malloz.

15 ANN AVE MARIS STELLA

Ni ho salud, steredenn vor,
Mamm da Zoue, leun a honor :
Guerc'hez bepred, dor, ann envou,
Selaouit ouz hor pedennou.

Resevit ar zalud santel
A reaz d'ehoc'h ann El-Gabriel,
Roit eur peoc'h ferm d'eomp er bed-ma,
O chench ann hano a Eva.

Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re zo dall roit sklerijenn ;
Pellait diouzomp peb drouk dalc'h-mad
Ha goulennit d'eomp peb seurt mad.

Diskouezit ez oc'h eur vamm vad
E keaver ann dud emzivad,
Grit m'hor selaouo ann Hini
Oc'h euz ganet evidomp-ni.

Guerc'hez dispar e peb feson,
Dous dreist ann holl, pur a galon,
Euz hor pec'hejou dilivret,
Grit ma vimp dous ha chast bepred.

Grit ma vezo hor buez par,
Preparit d'eomp ann hent asur,
Ma vesimp, o velet Jezuz,
Eunn deiz, ganehoc'h bepred eurz.

Gloar ato d'ann Tad Eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel ;
D'ann tri fersoun euz ann Dreinded
Ar memez honor 'zo dleat.

16 KONSEKRASION D'AR VERC'HEZ

Santez Mari, Mamm Doue, e pep amzer guero'hez,
Jezuz a zo va roue ha c'honi va rouanez ;
Evel ma'z eo va barker, bezit va fatrounez,
Hag evidon dirazhan bezit alvokadez.

Etouez ho servicherien me ho ped d'am reseo,
Meurbet eo dous ho servich, servich ar bed c'honero ;
Rak-se hoc'h abandouni, dilezel ho preuriez,
A ve redet d'ar malheur d'inn em goll da james.

Euz va ferz e prometann na rinn na livirinn
Netra enep hoc'h honor ; biken na bermettinn
E va den sujet d'inn-me ken hardiz, ken ingrat,
Da offensi Mamm Jezuz, eur vamm ken dous, ker mad.

Evit gallout henori ann hano a zeuget
A Vamm a vizerikord ; a Vamm Salver ar bed,
Me a bromet soulaji ar beorien afflijet,
Dre ma'z int holl ar memprou euz ho Mab benniget.

Hed va buez, em euvrou va zikourit bepred,
Dreist peb tra var va maro n'am abandonnit ket ;
Dre ho taouarn d'am Zalver prezantit va ene,
Sur ez inn d'ar baradoz dre ho sikour goude.

17

FIZIANZ E MARI

Me a laka va fizians,
Guerc'hez, enn ho sikour,
Akkordit d'inn szistans
Enep hon adversour ;
Pa skot va heur diveza,
Me bed ho madelez.
Da obteni d'inn beza
Plaset gant ann Elez.

O Mamm leun a drugarez,
O Guerc'hez benniget,
E peb leac'h ha bemget,
Hor zikourit bepred ;
Prezantit d'ho Mab Jezuz
Pedenn ho pugale,
James ne c'hell ho refus,
Sur oump a gement se.

Guerc'hez gloriuz Vari,
 Refuch ar bec herien,
 Me ho pad d'am c'honforti
 Em spount, em zroublienn ;
 C'houi am difenno guella,
 Ho Mab zo va roue,
 Ar pezh a ra d'inn krena,
 Va barnet eo ive.

Evit kreski ar c'hloar
 A zo dleet d'ehoc'h, Guerc'hez,
 M'ho karo var ann douar,
 Rouanez ann elez.
 Evit plijout d'ho kalon
 Ha guell hoc'h henori,
 Kement den zo dindanon
 A zouginn d'ho meuli.

Pa varyinn, va Mamm dener,
 Truezuz em andred,
 Kalmit justis va barnet,
 Pe sur e vinn kollet.
 O Mamm leun a vadelez,
 Difennit ho pugel,
 Ha betek fin va buez
 D'ehoc'h me vezo fidel.

Sec'hit eta va daelou,
 Mamm ar guir garantez ;
 Va c'hoñsolit em foaniou
 Hag em zristidigutez ;
 Torrit va holl jadennou,
 Resevit va c'halon,
 Rouanez euz ann Envon,
 Renit, renit, varnon !

18 ENN HENOR D'AR VERC'HEZ

Diskan :

Bemdez, bemnoz hag e peb ti,
 Meulomp Mari !

Pegen kaer eo ar c'hantikou,
 Pegen euzuz ar parrezion
 Pa lavar holl ar c'halounou :
 Meulomp Mari !

Plijet ganehoc'h, Sent hag Ele,
 Unani ho mouez gant hor re,
 Hor c'han a vo kaeroc'h neuze :
 Meulomp Mari !

Ni zo da Vari konsakret,
 Da Vari ni vezo bepred,
 Kanomp eta gant joazded
 Meulomp Mari !

Kalz a zoug respet da Vari
 Ha kalz o deuz fizianz ennh,
 Aman ann holl a zo dezhi :
 Meulomp Mari !

Mari, var ann Elez renet,
 Ann anaoun a boan tennet,
 Torrit holl nerz ann drouk-spered :
 Meulomp Mari !

Mari, refuch e peb mare,
 Mamm dous bepred d'ho pugale,
 C'houi hor c'hunduo da Zeue :
 Meulomp Mari !

Mari, n'hellomp obtan pardon,
 Na trec'hi ann dentasion,
 Nemed dre ho protkision :
 Meulomp Mari !

Heb Mari ne ver ket salvet,
 Gant Mari ne ver ket kollet,
 Mari, ni a vo dehoc'h bepred :
 Meulomp Mari !

Selaout, Mari, hor pedenn,
 Hed hor buez dent d'hon difenn,
 Deut var hor maro d'hor zouten :
 Meulomp Mari !

Mari, pa'z oc'h ken gallouduz
 Bezit ive trugarezuz,
 Hor prezantit d'ho Mab Jezuz :
 Meulomp Mari !

Grit ma vezo justis Done
 Dous e kenver ho pugale,
 Grit ma'z aimp da gana enn Ee :
 Meulomp Mari !

ANN ITRON VARIA

Diskan :

Peger kaer ez eo Mamm Jezuz,
 Pegen dous ha trugarezuz,
 Peger mad ha madelezuz !

Lavar d'inn-me, den ann Arvor,
 Ha ker kaer eo da vag var vor,
 Gant he goueliou guenn-kann digor ?

Lavar d'inn-me, den ann Argoat,
 Ha ker kaer dellou glaz ar c'hoat,
 Pa zeu eur ban-eol d'ho skleraat ?

Lavar d'inn-me, den ann Are,
 Ha ker kaer eo lein ar mene
 Guenn-kan gant ann ere'h, d'ar beure ?

Lavar d'inn-me, paotr ann denved
 Hag hen zo steredenn ebet
 Ker kaer enn noz steredennet ?

Livirit d'inn, tud ar meziou,
 Ha ker kaer ez eo glazennou
 O lintra-gant ar glizennou ?

Livirit d'inn, bugaligon,
 Er prajou o kutuil bleuniou,
 Ha bleun ker kaer zo er prajou ?

— Nag-enn Arvor, nag-enn Argoad,
 Er menez, enn oabl nag er prad,
 Netra ker kaer, netra ker mad.

20 ENN HENOR DA GALOUN MARI

Kaloun dous a Vari,
 Lenn a garantez,
 Ni deu d'ho saludi
 Gant ann holl Elez.

Diskan :

Ave, ave, ave Maria !
 Ave, ave, ave Maria !

Feunteun ann holl grasou,
 Sellit gant true
 Onz ann holl ezommon
 Euz ho pugale.

Tenval eo ar goabrenn,
 A bep tu arne ;
 Dilezet ar bedenn,
 Dilezet Doue.

Ia, memes enn hor Breiz,
 Guech-all bro ar Zent,
 Da Zoue, d'he Iliz
 Kalz a zo dizent.

Roit d'ann den dallet
 Gras ar sklerijenn,
 D'ar pec'her kaledet
 Gras ar binijenn.

Enn hon tiegeziou
 Lakit unlon,
 Hag enn hor c'halounou
 Guir relijion.

C'houi zo Mamm da Jezuz,
 Mamm ar gristenien,
 Refuj trugarezuz
 D'ann holl bec'herien.

Stouet oump d'ann douar
 Dirak ho kaloun,

Gant keuz ha gant glac'har
 O c'houlenn pardoun.

Brud euz ho trugarez
 A zo e peb bro,
 'Vit ker braz madelez,
 Holl ni a gano :

Ennhoc'h hon holl fizians
 Epad hor bue,
 Ennhoc'h hon esperans
 Er maro ive.

21 GUIR VUGALE AR VERC'HEZ

Guir vugale ar Verc'hez a die beza santel
 Ha startaat e gras Doue, bemdez betek mervel.
 Ann dud laosk-se ne rafent nemed falgalouni,
 Penaoz a c'helfent beza bugale da Vari ?

Guir vugale ar Verc'hez a vezo chaat ha fur,
 Strinka raint euz ho c'haloun peb elfenn tan impur ;
 Lent vezo ho daoulagad, ho ginou heb gevier,
 Ne d'aint morse d'al lec'hion a ve eunho danjer.

Guir vugale ar Verc'hez, diouz ann noz, ar mintin,
 Evit adori Doue a gouezo d'ann daoulinn :
 Abred ems ar pec'hed var rondou ann hini
 A zo, siouaz evithan, dieguz da bedi.

Guir vugale ar Verc'hez a garo ho nesa,
 Gant ar paour, enn han' Doue, e rannint ho bara ;
 Ober a raint joazdet hag ho mamm hag ho zad.
 Dre ma vint dous ha sentuz, ha mad da labourat.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo sketuz
 Da vont, eur vech ann amzer, betek aoter Jezuz,
 Evit he zigemet gant feiz ha karantez,
 Ha bale, heb fazia, var hent striz ar vuez.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo da Zoue
 Ho c'horf gant ho skianchou, ho c'haloun, ho ene,
 Kerzet raint er skerjenn ; ho dourn e dourn Mari,
 Betek ann deiz ma vellint ann Env o tigeri.

22 ROUANEZ ARVOR

Rouanez Arvor, oll ho saludomp,
 O Guerc'hez dinam, ennoc'h e kredomp ! (bis)

O Guerc'hez Vari, dre oll ha bepret,
 C'hui voue gant Breiziz an Itron garet.

Guechall hon tud koz, sentuz d'ho lezen,
 En em vouestlaz oll deoc'hui da viken.

Hag a-c'hondevez, al le zo miret,
 'Vel en deiz kenta ma 'z e bat touet.

Hon Arvor a vev dre ho madelez :
 Ni zo bugale deoc'hui da jamez.

Euz ho pugale, o Mam, klevit 'ta,
 Klevit ar beden hag ar bromesa !

O Mam hor Zalver, evel hon tadou,
 Ni ro da viken deoc'h hor c'halonou.

Mes prijit d'ho tro, arc'h a esperans,
 Souten an Iliz, savetei ar Frans.

Mar ba red difen ha honor d'hor bro,
 Ar Breizad kristen dispount a gerzo.

Dindan ho skoazel, epad an emgann,
 Soudard, martolod, 'ra fae var an tan.

Ar micherour paour, al labourer kez,
 A drid ho c'haloun gant ho karantez.

Mam, roit ho pennoz deomp ha d'hon tudou,
 Ha d'hor parkeier, koulz ha d'hon aochou !

D'hon tiegeziou ha d'hor bugale,
 Ha d'hor mignouned zo er gear du-ze !

D'hor martolodet ho pennoz ivez,
 Hi gas oc'h hano d'an Douar-Nevez.

Skullit ho pennoz var hor soudardet,
 Rentit d'ho banniel he gloar hag he sked.

Hag hed hor buez, euz ho krasou c'hui,
 Ni hor bezo sonj, o Guerc'hez Vari !

Euz ar roc'h santel, pa vimp en hor bro,
 Ar zonzj dudiuz ganeomp a jomo.

Endra bado 'r bruk var hor menezlou,
 Karantez hor Mam vo 'n hor c'halonou.

Rag ho pugale, o Guerc'hez santel,
 A c'hed dreizoc'hui ar yuez eternal.

Oll en ho kichen en env, eun devez,
 Fell dezho beza, Mamm a garantez !

AR ROZERA

CHAPELED A JOA

1. Sonjomp, d'ar genta difenez,
 Er joa e devoue ar Verc'hez,
 Pa oue gant ann El saludet
 Da veza mamm Salver ar bed.
2. Enn eil mister, sellomp Mari
 O kuitaat he bro hag he zi,
 Evit guelet Elisabet
 A zouge sant Iann banniget.
3. Enn trede mister, hor Zalver
 'Zo ganet enn eur c'hraou dister,
 Hg a lavar d'eomp distaga
 Hor c'haloun diouz traou ar bed-ma.

4. Er pevare mister joaiuz,
Ar Verc'hez gant he Mab Jezuz
En em oftr enn templ evidomp,
Gantho da Zoue 'en em offromp.
5. Er pemped mister, ar Verc'hez
A gavaz, goude tri devez,
He Mab e kreiz ann doktored,
Leun a farnez hag a spered.

CHAPELED A GEUZ

1. Ar c'henta mister truezuz
A ziskouez d'eomp glac'har Jezuz,
Beuzet enn eur c'houezenn a c'hoad
Ha stouet o pedi he Dad.
2. D'ann eil mister, e oue freuzet
He gorf santel a daoliou fouet ;
Evit ar pec'hajou mezuz
E c'houzany eur boan ken euzuz.
3. D'ann trede, e oue kurunet
He benn sakr, heb truez ebed,
Dre eur gurunenn great gant spern,
D'hon dilivra euz ann ifern.
4. Er pevare mister, Jezuz
Dindan eur groaz pounner, mezuz,
A gerz etrezek ar C'halvar ;
Heullomp-hen holl leun a c'hlac'har.
5. Er pemped mister, Mab Doue
A ro evidomp he vue.
Piou a vezo c'hoaz ken ingrat
Da offansi Jezuz ker mad ?

CHAPELED A C'HLOAR

1. Er c'henta mister gloriuz,
Kanomp meuleudi da Jezuz :
Savet eo bet eveuz ar hez,
Hervez he gomz, goude tri dez.

2. Jezuz enn eil mister a c'hloar,
A zeu da guitaat ann douar ;
Sevel a ra d'ar baradoz,
Eno ema ouz va gortoz.
3. Enn trede mister, me a vel
O tiskenn var ann Ebestel
Ar Spered-Santel, euz ann Ee,
Pehini o rent tud neve.
4. D'ar pevare mister, Mari,
E kreiz ar joa, ar veuleudi,
Korf hag ene a zo donget
D'ar Baradoz gant ann Eled.
5. D'ar pemped, e oue kurunet
Mari, hor Mamm, gant ann Dreinded :
Ean Eny, rouanez ann Ele
N'ankouao ket he bugale.

MAGNIFICAT

Magnificat * anima mea Dominum.
Et exsultavit spiritus meus * in Deo salutari meo.
Quia respexit humilitatem ancillæ suæ, * ecce enim ex
hoc beatam me dicent omnes generationes.
Quia fecit mihi magna qui potens est, * et sanctum no-
men ejus.
Et misericordia ejus a progenie in progenies * timentibus
eum.
Fecit potentiam in brachio suo ; * dispersit superbos mente
cordis sui.
Deposuit potentes de sede, * et exaltavit humiles.
Esurientes implevit bonis, * et divites dimisit inanes.
Suscepit Israel puerum suum, * recordatus misericordiæ
suæ.
Sicut locutus est ad patres nostros, * Abraham et similia
ejus in sæcula.
Gloria Patri, etc.

25 AVE MARIS STELLA

Ave, maris stella,
Dei mater alma,
Atque semper virgo,
Felix caeli porta.

Sumens illud ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Evee nomen.

Solve vincla reis,
Profer lumen caecis,
Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem,
Sumat per te preces,

Qui pro nobis natus
Tulit esse tuus,

Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culpis solutos
Mites fac et castos.

Vitam praesta puram,
Iter para tutum,
Ut videntes Jesum,
Semper collaetemur.

Sit laus Deo Patri,
Summo Christo decus,
Spiritui Sancto
Tribus honor unus.

26 D'HOR MAMM SANTEZ ANNA

Diskan :

D'hor mamm santez Anna,
D'an Itron Varia,
D'hor Zalver benniget
Ni vo fidel hepred !

Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkrez,
Ni a zo daoullnet,
Dirazoc'hui Guerc'hez.

Kurun hag avel foll
Varnomp zo dirollet,
Hor bro zo vont da goll :
Truz ! mamm benniget.

Lezen Doue guechall,
Rene ker kaer ar vro,
Hirio lezen tud fall
He stlej eun d'ar maro.

'Vel eur vanden chas mud,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint etouez an dud
O klask mouga ar Feiz.

Ni zo guir gristenien,
Krouadrienn Doue,
Savet en he lezen
En he zoubjans ive.

Ni a zo kristenien
Prenet gant goad Jesus,
Maget dre c'houre'hemen
Gant he gorf presius.

Kristenien, hor baniel
A zo kroaz hor Zalver,
Ni her zao soun 'n huel,
Bemdez, e peb amzer.

Eur vrezel griz meurbet,
Zo great d'hor bugale ;
Ah ! n'ho dilezit ket,
C'hui zo ho mamm ive.

Ar falla kenteliou
Zo roet dezho hepred,
Koll a raint ho eneon
E skol an Drouk-Spered.

Sempl, dinerz, ker bian,
Ma ne vent diouallet,
Gant nebaut a boan
Abred vezfent trec'het.

Petra dalv guiziegez,
Mar gollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A zo oll e Doue,

Guechall hon tadou koz,
Brudet 'vit ho furnez,

A glaske 'r baradoz
Araok ar guiziegez.

Skienchou zo nefra
Pa'z eont enep Doue ;
Ni fall deomp dreist peb tra
Savetei hon ene.

Guerc'hez, hor mamm santel,
Roit sikour ep dale.
E plegou ho mantel
Kuzit hor bugale.

C'hui a zo gallouduz
Var galon hor Zalver,
Bezit madelezuz,
C'hui zo eur vamm dener.

E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni oll, Guerc'hez,
Beteg heur hor maro,
Ni a gano bemdez :

27

OLL DA ZOUE

Diskan :

Klevit, o Mamm a druez,
Peden hon tadou koz :
Oll da Zoue epad hor buez, } bis.
Oll da Zoue er baradoz !

Ni gar Doue e penn hor skoliou,
Ebdhan skol vad ne gaver ket ;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Ebdhan nag urz na peoc'h ebet.

Ni gar Doue var hor menezion,
Ni gar Doue var hor mor glaz,
Ni gar Doue e kreiz hor c'hoajou,
En hor c'halonou mil gueach
[c'hoaz !

Air français : *Nous voulons Dieu.*

Ni gar Doue en hor pardonioù,
Doue a ra ho levenez !
Ni gar Doue en hon eurejou,
Doue ho joa hag ho danvez !

Ni gar Doue, ni gar he lezen,
Pell diouzomp, tud dizoue !
Ni gar Doue, ni gar ar beden,
Doue eo mezur hon ene !

Ni gar Doue hag he groaz santel,
Var gement hent, e kement ti !
Kroaz Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgalouni !

Ni gar Doue, ô tud digreden,
A c'hoanta heb diskar er vro.
Ni lavaro gant hor feiz kristen :
Kentoc'h mervel ivez d'hon tro !

Oll da Zoue hor bugaligou,
Hon tud iaouank o vont er bed !
Oll da Zoue, gant hor priedou,
Hon tud koz var hent ar vered !

Oll da Zoue hor martolodet,
En doun-vor dare da dremen !
Oll da Zoue hor guir soudardet,
E kreiz an tan, var an dachen !

Oll da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat !
Oll da Zoue ! Setu hon hênor,
Setu hon nerz e pep stourmat !

Oll da Zoue !... an hano kaer-ma
Hon harpo ouz an dud difeiz.
Oll da Zoue !.. Skrivomp anezhan
Var gement karrek zo e Breiz.

Oll da Zoue !.. E pred er maro,
Doué d'he dro ne nac'ho ket
Kement kristen mad a lavaro :
Biskoaz Doue n'em euz nac'het !

28 EVIT AR VENEDIKSION

O salutaris hostia,
Quæ cœli pandis hostium,
Bella premunt hostilia ;
Da robar fer auxilium.

Uai trinoque Domino
Sis sempiterna gloria,
Qui vitam sine termino
Nôbis donet in patria. Amen.

Sub tuum præsidium confugimus sancta Dei genitrix ;
nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus : sed a
periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et bene-
dicta.

Oremus pro Pontifice nostro N***. — Dominus conservet
eum, et vivificet eum, et beatum faciat eum in terra, et non
tradat eum in animam inimicorum ejus.

Tantum ergo sacramentum
Veneremur cernui,
Et antiquum documentum
Novo cedat ritui :
Præstet fides supplementum
Sensuum defectui.

Genitori Genitoque
Laus et jubilatio,
Salus, honor, virtus quoque
Sis et benedictio :
Procedenti ab utroque
Compar sis laudatio. Amen.

TAOLENN

N ^o .	Pajenn.
1. Spered-Santel, Spered a sklerijenn	3
2. Adoromp holl	4
3. Sonjit, den faziét	5
4. Selaouit, ma Jezuz	5
5. Diskennomp holl	6
6. Doue, guir bried	7
7. Pa zaoulinomp	8
8. Etez euz ar baradoz	9
9. Deut, va Doue	10
10. Me 'm euz preparet	11
11. O Kaloun Sakr euz va Jezuz	13
12. Meulomp holl da jamez	15
13. Jezuz, peger braz ve	15
14. Euruz ann hini	17
15. Ni ho salud, steredenn vor	18
16. Santez Mari, Mamm Doue	19
17. Mé a laka va fizians	19
18. Bemdez, bemnoz hag e pob ti	20
19. Peger kaer ez eo Mamm Jezuz	21
20. Kaloun doué a Vari	22
21. Guir vugale ar Verc'hez	23
22. Rouanez Arvor, oll ho saludomp	24
23. Sonjomp, d'ar genta dizenez	25
24. Magnificat	27
25. Ave, maris stella	28
26. D'hor mamm santez Anna	28
27. Oll da Zoue	29
28. Evit ar VenedikSION	30

